


NE GONDAONAN KET

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg



*Diskan (2w.) : Ne gondaonan ket ahanout,
Kee eta ha na bec'h mui !*

- | | |
|---|---|
| 1. Farizianed ha Skribed
'Doa reñket mad o zaol,
Ar vaouez oa bet tapet
Ha tapet war an taol ! | 4. "D'an hini a zo dibec'h
Taoler outi ar mên."
Hag eñ atao ken dinec'h
Ne gomzas kén da zén. |
| 2. Da Jezuz 'oe degaset
En ano Moizez :
"Labezit ar seurt merhed"
Ha te, petra a rez ? | 5. Ar re gosa a dehas,
Neuze 'kouezas ar vein ;
Hag an oll dud a dehas.
Neuze 'savas e gein. |
| 3. Ha Jezuz a zaoublegas
Da skriva gand e viz ;
Med int-i a gendalhas :
"Ha te, petra a rez ?" | 6. Ha Jezuz da lavared :
"Maouez, plec'h emaint 'ta ?
Dén n'e-neus da gondaonet ?
Na bec'h mui ha kee 'ta !" |

JE NE TE CONDAMNE PAS

R: Je ne te condamne pas, Va donc et ne pêche plus !

1. Pharisiens et Scribes Avaient bien monté leur coup, La femme avait été prise Et prise sur le coup.

2. A Jésus, elle fut amenée Au nom de Moïse : "Lapidez ces femmes-là" Et Toi, que fais-Tu ?

3. Et Jésus se baissa Pour écrire du doigt ; Mais eux continuèrent : "Et Toi, que fais-Tu ?"

4. "A celui qui est sans péché De lui jeter la pierre. " Et lui, toujours aussi assuré, Ne parla plus à personne.

5. Les plus vieux s'en furent, Alors retombèrent les pierres ; Et tous s'en furent. Alors, il se releva.

6. Et Jésus de dire : "Femme, où sont-ils donc ? Personne ne t'a condamnée ? Ne pêche plus et va !"